

# KANTIK

en honor da Itron Varia ar re glanv

*Salus infirmorum,  
Refugium peccatorum,  
Porta Cæli.* } O. P. N.



## VIII

C'houi zo pareans ar glanvourien,  
Gwerc'hez Vari, mez gwelloc'h c'hoaz :  
C'houi a zo gwarez ar bec'herien  
A stagas ho mab euz ar groaz.

## IX

Dre ho torn e teu an oll grasou  
Evit ar c'horf hag an ene,  
C'houi a zo hanvet dor an nenvou :  
Porta cœli, mater, Ave.

GWENNAEL.

Imprimatur

Kemper, 25 Here 1928.

P. MESSENGER,  
Vikel-Vras.

(69)

O Gwer-c'hez san - tel, mam da Je - zus,

Grit eur zell ou-zomp, ni ho ped,

Hag ouz horstad be - zit tru - e - zus,

Rag hor bu - ez zo trenk meur-bed.

San - tez Ma - ri, Gwer - c'hez ven - ni - get,

Pe - dit e - vi - domp pe - che - rien,

Din - dan sam hor poa - niou daou-ble-get;

Kle - vit mouez ho par - do - ne - rien.

## I

O Gwerc'hez Santel, mam da Jezus,  
Grit eur zell ouzomp, ni ho ped,  
Hag ouz hor stad bezit truezus,  
Rag hor buez zo trenk meturbed.

## DISKAN

Santez Mari, Gwerc'hez venniget,  
Pedit evidomp pec'herien.  
Dindan sam hor poaniou daoubleget;  
Klevit mouez ho pardonerien.

## II

Doùe 'n doa krouet an den eürus  
E liorz Eden, ha padal  
Eo red d'eomp gounid er bed poanius  
Hor bara diouz c'houezen hon tal.

## III

Gwan eo hor c'horf, dister hor yec'hed  
— Gwerc'hez Vari, ne glemmomp ket —  
Ar hoan a zo digouez ar pec'hed,  
Ha ganeomp ez int deut er bed.

## IV

War hent ho mab, dre ma tremene,  
Gwechall pa veve 'touez an dud,  
An dall a wele ar c'ham a gerze,  
Ar gomz a deue d'an den mud.

## V

Rei a rea d'ar bouzar ar c'hleved,  
Glanded ar c'horf d'ar paourkeaz lor,  
Hag an den seizet, gant e c'hole'hed,  
Valee skanv dreist treuz an nor.

## VI

En eur yudal, an drouk-sperejou  
A ziskroge trum euz o freiz.  
Hag ar maro zoken, d'e gomzou,  
A rent d'e vam he mabig keiz.

## VII

Hirio-ni a c'houlen ho skoazel,  
Mam hor Zalver, gant fizianz krenv,  
Ni glask goudor dindan ho kazel  
Rag c'houi zo gallouduz en nenv.